



GOUVERNEMENT

Liberté  
Égalité  
Fraternité



DRE ATIZ KUZUL UHEL AN DESKADUREZH ARZEL HA SEVENADUREL

# KARTA EVIT

## an deskadurezh arzel ha sevenadurel

1

Ret eo d'an deskadurezh arzel ha sevenadurel bezañ digor d'an holl, da gentañ-penn d'an dud yaouank er skolioù, eus ar skolioù-mamm d'ar skolioù-meur.

2

An deskadurezh arzel ha sevenadurel a dalvez **ober anaoudegezh gant an oberennoù, kejañ gant an arzourien, pleustriñ an arzoù ha deskiñ gouiziegezhioù.**

3

Graet eo an deskadurezh arzel ha sevenadurel evit akuizitañ ur sevenadur boutin, pinvidik ha liesseurt koulz en e stummoù kozh hag a vremañ, pobl ha gouziek, broadel hag etrebroadel. Un **deskadurezh d'an arz eo.**

4

An deskadurezh arzel ha sevenadurel a vroud santidigezh an dud hag ar geodedourien, o spered krouiñ hag o skiant varn, ha gant-se e sikour stummañ anezhe ha lakaat anezhe da vleuñviñ. Un **deskadurezh dre an arz** eo ivez.

5

Gant an deskadurezh arzel ha sevenadurel e vez dalc'het kont eus **kement mare ac'h a d'ober buhez ar re yaouank**, da-geñver un treugad kempoell hag a vez lakaet **o familh hag o mignoned en-dro dezhe** da gemer perzh ennañ.

6

Gant an deskadurezh arzel ha sevenadurel e c'hall ar re yaouank **kavout ur ster d'ar pezh a vez bevet gante hag en em santout muioc'h en o jeu er bed a vremañ.**

7

Gallout a reer digeriñ an deskadurezh arzel ha sevenadurel d'an holl re yaouank a-drugarez da **youl ar gevelerien a-stroll** : ar gumuniezh desavadurel ha bed ar sevenadur, ar c'hevredigezhioù hag an dud distag diouzh bed ar politikerezh, ar Stad hag ar strollegezhioù lec'hel.

8

Stag eo an deskadurezh arzel ha sevenadurel ouzh ul **lañs oberoù kaset gant ar gevelerien-se holl asambles** (empentiñ, priziañ, lakaat da dalvezout).

9

Evit an deskadurezh arzel ha sevenadurel eo ret **stummañ an obererien** abalamour dezhe d'anavezout gwelloc'h an eil egile ha da gaout gouiziegezhioù diazez boutin.

10

Dav eo ober **labourioù enklask ha priziañ** war danvez an deskadurezh arzel ha sevenadurel hag al lañs a vez roet dezhi, evit gallout muzuliañ levezon an oberoù, gwellaat o c'halite ha broudañ an oberoù mod nevez.

